

M'HOC'H ADOR DOUE

Pedennou diouz ar Mintin

(Evid adori Doue)

Tad Maner ha Tad Barnabé

Ton " Pedenn Vintin "

1.M'hoc'h a - dor, Dou - e, va c'hrou - er, M'hoc'h _ a - dor, Je - zuz, va Zal - ver;
 2.Mil ben - noz deoc'h, o va Ao - trou, E - vid hoc'h oll ma - do - be - rou:
 3.Ke - ment a rin, a la - va - rin, A ___ c'hou - zañ - vin hag a zoñ - jin,
 4.C'hwi 'zo san - tel, ha me pe - her, A - raog tos - taad ouz hoc'h ao - ter,

1.Ar béd a - bész a gan ho _ kloar: San - tel ha mad, _ c'hwi 'zo dis - par.
 2.D'am be - za grêt, pre - net, mi - ret, Hag en hoc'h i - liz ke - me - ret.
 3.A gin - ni - gan e - vid ho _ kloar, Keid ha ma vin __ war an dou - ar.
 4.E ran eur zell war va bu - ez, Hag o pe - dan __ da gaoud tru - ez.

1. M'hoc'h ador, Doue, va c'hrouer,
 M'hoc'h ador, Jezuz, va Zalver;
 Ar béd a-bész a gan ho kloar :
 Santel ha mad, c'hwi 'zo dispar.
2. Mil bennoz deoc'h, o va Aotrou,
 Evid hoc'h oll madoberou :
 D'am beza grêt, prenet, miret,
 Hag en hoc'h iliz kemeret.
3. Kement a rin, a lavarin,
 A c'houzañvin hag a zoñjin,
 A ginnigan evid ho kloar,
 Keid ha ma vin war an douar.
4. C'hwi 'zo santel, ha me peher,
 A-raog tostaad ouz hoc'h aoter,
 E ran eur zell war va buez,
 Hag o pedan da gaoud truez.

JE VOUS ADORE

1. Je Vous adore, Dieu, mon Créateur,
 Je Vous adore, Jésus, mon Sauveur;
 Le monde entier chante votre gloire;
 Saint et bon, Vous êtes unique.
2. Mille fois merci, mon Seigneur,
 Pour tous vos bienfaits :
 Vous m'avez créé, racheté, protégé,
 En votre Église, vous m'avez accueilli.
3. Toutes mes actions, mes paroles,
 Mes souffrances, mes pensées,
 Je les offre pour votre gloire,
 Tant que je vivrai sur cette terre.
4. Vous êtes Saint, je suis pécheur,
 Avant d'approcher votre Autel,
 Je jette un regard sur ma vie,
 Et Vous prie de me prendre en pitié.